

KIS-681 – Ur geriadur divyezhek

(YBAN da GE – 24 05 00)

E 'm soñj emañ bepred ar geriadur divyezhek, rak me gav din e ve ur benveg dreist. Anat ez eo ul labour war grenn dermen, nemet e ve mat kregiñ adalek bremañ. A-genstur d'ar geriadur-se eo dav diorren ar c'hramadeg, ezhomm vo eus an termenoù evit ar geriadur.

Penaos ober ? Kemer da zave ur geriadur divyezhek a vremañ, saoznek-gallek da skouer ? Pe ar *Petit Robert*, na mui na maez (hep an daveoù andereat !) ? Klask a rin ober un taol arnod ha gwelet e vo. Ha div lodenn a ve : brezhonek-gallek ha gallek-brezhonek ? N'eo ket peurziskoulmet an doare da ginnig an enmonedoù brezhonek, a gav din. Ar brezhoneg n'eo ket ar galleg, ur wech ouzhpenn, heblekoc'h eo ha n'eus ket gerioù digenvezet a c'haller marilhañ en ur roll... Trevnad al lostgerioù en diskouez, evel a du 'rall hini ar rakgerioù. Bezet an enmoned **kavout** : hag ur ger all eo **emgavout** ? Mar galler stagañ **em-** ouzh forzh petore verb, hag un termen nevez a eskor ? Ha renket e vo **emwalc'hiñ** ha **gwalc'hiñ** e daou lec'h ? Alies e c'hoari ar gwered divellekaat, evel **gwelout** hag **emwelout**. Ha ne zegaser ket kudennoù nevez o tisteurel **en em** ?

Da skouer, mar lavaran : “an daou zen a emwel”, hag “an daou zen en em wel”, petra vo komprenet ? Ha ne savo ket kudennoù damheñvel gant **emgavout**, **emvirout**, **emdreñ**, h.a. ? Ha spirus eo lavarout n'eo ket reizh e-keñver istor ar yezh evit disteurel **en em** ? Ha ne zegase ket ur galluster ouzhpenn ? Eleze an tremen eus ar vellsteriegezh d'an divellsteriegezh ?

Pe neuze ober evel e brezhoneg Ereg : “Jézus um den nezé ar ur mañne [...]” ? Eleze : “Jezus em denn neuze...”, hep ar skorelloù **a pe e** ? Pe mirout ar skorelloù : “Jezus a em denn neuze...” ? Me gavfe kenkoulz an doare diwezhañ-se, ha ne welan ket perak e ve ret stagañ **em** ouzh ar verb.

Evit echuiñ : da 'm meno n'eo ket fur mont da heul *An Here* a-fet reizhskrivadur. Ne zegas netra evit a sell an dezevout, strafuilh ne lavaran ket. Evit liesterioù Br. **mederez** hon eus aliet mirout **-ed**, tra ma kinnig *An Here* **-ioù** hag **-ed**. Heñvel dra evit pennanorioù zo : **derc'hel** ha n'eo ket **delc'her**... *Idem* evit **dezev** ha

n'eo ket **dezv**. Hag all, hag all... N'eo ket un dra vat kemmañ an traoù evel se. Degas a ra reuz ha freuz, ha prientiñ a ra an displeberadur. Pa na c'haller ket kemm ar werc'helezh e kemmer ar gerioù ! Aze ez eur barrek avat ! Me lavar dit e c'haller kenderc'hel e-pad pell en doare-se. Setu perak e lavaran : harz ! Diazez ar reizhskrivadur zo hini NDBF. A-walc'h gant koroll an **h**-où. Perak abegiñ **anezhe** a hent all ?

War a ouzon ne vo ket tennet al lizherenn **d** eus ar Gl. **poids**. Evidon me ez eo seurt alfo reizhskrivañ ur c'hleñved bugelel “difenmourion ar brezhoneg”, hag en degouezh-se ez eo ivez “ar gwell enep ar mad”. Petra a soñjfes eus ur c'hengor bennaket da “reizhañ” ar brezhoneg a zo e geriadur Roparz HEMON ? Dav diwall aze, dreist holl gant pezh zo o c'hoari er mare-mañ.

(GE da YBAN – 30 05 00)

Ar gudenn a savez a-zivout ar geriadur da aozañ n'eo ket unan vihan. Abaoe ur pergont vloaz ez omp prederiet ganti. Ken abred hag ar bloavezhioù pemont, e 'm eus soñj, e kenskrivemp gant Pêr MANAC'H

(a oa neuze ur bennadurezh eus *Kuzul ar brezhoneg*) a rae anv eus al *Larousse* brezhonek da sevel. Kement-se a adkavad e froud ar mennozioù a gemeras korf gant SADED. Da verkañ e oa gant *Dafar 63 & 64* un egin eus ar geriadur unyezhek a hetemp. E-touez ar poentoù abebet gant koumananterion 'zo en daou *Dafar* e oa o unyezhegezh end-eeun : ne c'hallent talvoud da zen dre ma chome ar gerioù digompren gant an dud (“kompren” o vezañ gouzout pe gevatal gallek a oa da bep ger). En desped da warveiz an arguzenn e tilezjomp ar geriaduriñ unyezhek ha boulc'het e voe rummad an DGYA. Evel a ouzout ez adstagas *An Here* gant erbar an unyezhegezh, endra gendalc'he ar geriadurioù divyezhek hollek da zont er-maez, o korvoiñ mengleuzioù eus un amzer all, an hini nevesañ o vezañ yezh *Walarn* dindan neuizioù lizet pe lizetoc'h.

Intent a ran da lusked pa soñjez en ur geriadur divyezhek eus ar yezh kempred : dav eo pourchas ur benveg d'an danvez brezhonegerion. An un mennoz zo war spered Alan MONFORT. Ne oufen ket bezañ a-enep — gant ma ve kavet an dud evit kas al labour. Un evezhiadenn bennak a rin evelkent :

- Diforc'h diouzh ar savlec'h hevelebour (= hon yezh zo lodek e stuzegezh hon c'humuniezh) emañ ar savlec'h a adanvin “eskoradour” (= hon buhez a engwezhiomp e chanter ar yezh-mañ-yezh e kement ma 'z eus anezhi ul lec'h eskoriñ dibarek). War se e tivizemp Alan Ar Berr ha me dec'h da noz hag Alan a boueze war ar poent-mañ : a-benn bremañ eo dibradet ar brezhoneg, krog da

vat eo an donedigezh drezañ eus un danvez denel na eskor dre yezh all ebet. An arvez-se eo a zleer lakaat war wel dirak an danvez yezherion mar fell dimp na gouezhfent ken, evel ma reont holl hiziv, en anrod hevelebour. An dañjer gant ar geriadur divyezhek eo e ve masklet an arvez eskorañ, an hini nemetañ a ro kantreizh d'ar brezhonegañ hiziv.

- An holl ac'hanomp o deus kroget (hag a gendalc'h) da zont d'ar brezhoneg dre ar galleg, eleze dre ar geriadurioù divyezhek etre araezioù all. Ne c'hellomp ket goulenn digant an danvez yezherion chougañ sammoù na vemp ket evit dougen. Plediñ a zleer gant an tremen a yezh da yezh ha diziouerus eo ar geriadur divyezhek kempred a ambred. Un emell mavek n'eo ken avat, a rank koulskoude bezañ dezevet en e bezh ; degas tud d'ar brezhoneg ne c'hallo ket bezañ atav deskoniañ marmouzion derez uhel na goulenn diganto emhevelebiñ ouzh ur gumuniezh yezherion darvanel. Ur preder a chom da ren war an den hag ar yezh hag ar preder-se a zle tresañ hentoù an dont d' ur yezh. Da c'hortoz, e ranko moarvat ar gelennerion vrezhoneg mont c'hoazh gant ar rañvedoù henvoazel pleustret abaoe seikont vloaz.

- Emañ ar geriadur divyezhek war ar stern endeo. Rak petra a ra Alan Monfort ma n'eo ket daspugn an dafar anezhañ ? Ur wech echu eil embannadur e levr e vo ur c'hoari stlennegel lakaat an danvez anezhañ e rezh kraoñell ur geriadur. Loc'hañ diwar ar *Petit Robert*, embregadenn re vras forzh penaos evit ar c'hoskor beziat, a lakfe an aozerion en arvar da greizañ o spered war ar galleg ha da spazhañ nep lusk eskorañ. An hent kemeret gant Alan Monfort, ouzhpenn bezañ pleustradus, a ya betek ur par hebiou d'ar geriadurioù gallek dre zaveñ da gentañ d'hon buhezadur. Geriadurioù Roparz Hemon ne ziwanjont ket dre un hent all : a-c'haoliad e oant war lavar emsaverion ar mare ha lavar bed ar mare, hep bezañ enklozet nag en eil nag en egile — mar bijent bet melezeour yezh an emsaverion e vijent bet bac'hioù hevelebek (hep komz eus o faourentez vras), mar bijent bet melezeour ar bed kempred (ha dre se heklevioù d'ar galleg pe d'ar saozneg), ne vije ket bet degaset ganto ar brezhoneg d'an eskorusted a zo e hini bremañ. Kentañ tra a 'm eus merzhet gant embannadur kentañ levr Alan Monfort, daoust d' e davantegezh, eo ez addigore an hent bet boulc'het seikont vloaz 'zo gant Roparz Hemon.

- Un arvez all zo d'ar gudenn : ar yezh kempred zo enni miliadoù gerioù a-vec'h arveret pe arveret e skourroù kalvezel al lavar : kalvezel, eleze er-maez eus kalon ar gedvuhez. Al lennegezh, ha Roparz Hemon en adlavare, eo al lavar nesañ da galon ar vuhez. An termenoù o vont d'ur geriadur hollek eo gwell a galz ma vent gerioù kiget ha gwadet gant ar vuhez ha kaougantet gant al lennegezh. Setu perak e soñj Alan ivez ez eo *Aber* un darvoud — ouzhpennañ a ran : daoust d' ar skorterioù, a-fet damkanañ pergen, a stader enni.

- A-du on ganit evit a sell an daskemmoù graet e furmoù ar yezh. Oc'h adkemer an droienn gensakret : abegoù sonn a ranker kaout evit asantiñ dezho. Dav da gentañ anaout luskedoù an daskemmerion. Anv ebet evel just da zarallañ ar skrivadoù dre zamant d' al lec'helezh pe dre abegoù istorel o rannañ

gant al lec'helouriezh ur youl d'an hevelepted. War se e'm eus bet tro da skrivañ alies¹. Degas a rez afer “*em* skorell pe rakger ?

”. GP a zivizas krennañ *en em* en *em* ; AAB, e-barzh troidigezh GC diwar Grignon de Montfort, a rakgeraas *em*. Mar goulennet ma ve adwelet ar gudenn, perak ket, hogen an abeg a roez, an diaester da glenkañ ar gerioù er geriadur, ned eo ket degemeradus (Roparz Hemon ivez, evit gallout klenkañ araogennoù 'zo war a anzavas din², a ouzhpenn kedelloù !)

• “Ur c'hengor bennaket da "reizhañ" ar brezhoneg...” ? Dre vousfent emichañs en hon goudroez d' e sevel... Ha ne ve ket ur furm all d' an tech a damallez (kemman ar gerioù pa na c'haller ket kemman ar werc'helezh) : liesaat an aozadurioù pa na c'haller ket liesaat al labourerion ?

(YBAN & GE dre bellgomz – 01 06 00)

[YBAN] An displett pennañ a welan gant erlec'hiañ *em-* ouzh (*en*) *em* eo e vez diverket ar c'hemm etre, lakaomp, divellsteriegezh (*en*) *em gavout*, (*en*) *em dreñ* ha mellsteriegezh *emgavout*, *emdreñ*.

[GE] Anzav a ran e c'haller diforc'hiñ kemeradurioù dre duniou skrivañ. C'hoarvezet eo bet din¹ arverañ ur gedell da zispartiañ *dister* ha *di-ster* pe ginnig skrivañ *atreñ* evit kevenebañ an nevezc'her-mañ a vennen divellek ouzh an termen mellek *adtreñ* — o vont zoken betek goulakaat ur c'hemm distagadur etrezo. Hevelep tunioù avat ne c'haller ket kemer da reolenn : hep mont dre bennaenn betek disteurel an trestummañ e kav din e tle hemañ chom nemedennek. Peurvuiañ n'eus ezhomm tun ebet da ziveskañ ar c'hemeradurioù ; da skouer pa lenner e GSTL. ar bomm “*an arveriad dibenn*” ez intenter bepred “an arveriad diwezhañ” ha n'eo ket “an arveriad hep penn” : sklaeriet e vezer gant ar c'hemperzh pe, d'ar muiañ, gant ur c'hempenn a ra an aozer d' e brezeg evit lemel ar forc'hellegezh ; da skouer, war-benn hepkoriñ ar mesk etre an daou ster eus *diloc'h* er bomm “*poent diloc'h*” e lavaro kentoc'h “*poent loc'hañ*” pe “*poent fest*” hervez an dro. Evit a sell ar verboù rakgeriet dre *em-*, ne gav

¹ Sl. da skouer : KIS-461, “A-zivout reizhskrivadur”, La-10, pp. 217 hh.

² Sl. kevarad diwezhañ va lizher 235b eus an 25 04 77 da Roparz HEMON (skrivet goude lenn ar pennad gantañ war *Al Liamm* 181 : “Ur geriadur unyezhek”) ha kevarad diwezhañ e lizher respont 236 eus an 02 05 77 in La-08, pp. 458-459.

¹ Sl. KIS-329, La-08, p. 302.

ket din o defe bet ar skrivagnerion a ra ganto abaoe 1995 da barraat ouzh o amsteriegezh.

Dav emgrennañ (pe en em grennañ !) da welout kemeradurioù nevez o tiwanañ dizehan diouzh an un furm — sell da skouer an durc'hadurioù niverus ha kemplezh kemeret gant hBr. *im-*, krBr. & Br. *em(-)*, Kb. *ym-*. War a hañval e chomas sonnet steriegezh *em* e krennvrezhoneg, sammet gantañ an arc'hwel emodel ; eno e welan ur merk a grinaat — keñveriompe gant paotidigezh durc'hadurioù ster Kb. *ym-*. Kevenebiñ un *em* skorell ouzh un *em-* rakger e 'm eus aon e ve ur skoilh kentoc'h eget ur splet evit advlivaat steriegezh ar furm-se.

(YBAN da GE – 04 06 00)

E gwir hon eus pep tra da zeskiñ c'hoazh. Ha mall zo warnon gwelout ur c'hramadeg eus ar brezhoneg savet gant ar spered nevez. Souezhus eo ar frazenn vrezhonek ha n' hon eus ket tennet an holl sun evit c'hoazh. A-du ganit evit diazezañ war ar brezhoneg ha ne 'm eus bet mennoz all ebet ! Nemet er blegenn m' emaomp e ranker tremen c'hoazh dre ar galleg e meur a geñver, rak galleg eo ar gevredigezh ha gallegion eo hon danvez brezhonegerion. Setu perak e kav din eo a bouez sevel ur geriadur galleg-brezhoneg ar c'hlokañ ar gwellañ, ur benveg ardreuzat ne vo ken forzh penaos. Rak ar pal zo ur vuhez klok e/dre/gant ar brezhoneg. A du 'rall e tennimp korvo eus al labour-se evit kas hon erv war-raok, hag er c'hiz-se hon eus graet a-hed ar wech. Dav kenderc'hel gant ar geriadurioù arbennikaet hep ket a var. War an dachenn-se ne 'm eus douetañs ebet. Hogen mall eo digeriñ chanter ar yezh pemdeziek ivez, ur gwan eo betek henn.